

# CHANSON AR BONOMIC

## CHANSON NEVEZ

### 1<sup>er</sup> Couplet

Debonjour deoc'h, Jeannedic.  
Debonjour a lavarau c'han-c'han.  
En pelec'h he ma ar bonomic,  
Panema o toma c'han-c'han.

### 2<sup>me</sup> Couplet

E ma duze el liors o c'havessat an ed,  
Men a gret, o c'havessat an ed;  
It-hu hardi de gaout,  
Ha no refusoquet, me a gret.

### 3<sup>me</sup> Couplet

O bonjour deoc'h Bonomic.  
Bonjour a lavarau c'han-c'han,  
Ho merc'h'evit ar fortun  
Ganeoc'h e c'houlennan breman.

### 4<sup>th</sup> Couplet

Ho nan! va merc'h Jannedic  
Na zimezo quet c'hoas evit c'hoas.  
Chom a rei, eun daou pe dri bloas  
Da roulan eb at c'hoas evit c'hoas.

### 5<sup>th</sup> Couplet

Keus a pezo. Bonomic  
Dam beza refuset, me a gret,  
C'houi a zeuio de c'hinig dime  
Ha me ne c'homering quet, ne ring quet.

### 6<sup>th</sup> Couplet

Clasquit o sac'h, den yaouank  
A laruit-han var ar scoa, ya-da,  
Quer kouls e eoc'h e gaouet  
Er bloa-ma e vel e gaout da vloa.

### 7<sup>th</sup> Couplet

Var ben eis de da c'houde  
Jannet zo chomet clan, va clan,  
Ma commaes ar Bonomic.  
Dont d'en em chagrina c'han-c'han.



310

*8<sup>me</sup> Couplet*

Neuze e ya ar Bonomié,  
Da fouetta bro c'ho-c'ho.  
Da glasq Fanchic da Jeannedic,  
Evit an dimezi c'hoas evit c'hoas.

*9<sup>me</sup> Couplet*

Lavaret he moa deoc'h, Bonomic  
O pije va c'hlasquet, hac abret,  
E teujoc'h de c'hinig dime,  
Ha me ne c'homerin quiet ne rin qnet.

*10<sup>me</sup> Couplet*

Brema e teu Jeannic,  
Da gaout Fanchic, meve c'hoas.  
Da c'houlén eur bouch gantan,  
Evit an disparti, c'hoas evit c'hoas.

*11<sup>me</sup> Couplet*

Ho ya evit eur bouch, na daou,  
Nag ive tri, pa eo c'houl'  
Ha mallos dar goal deoudou  
Zo caos don disparti ha hini

FIN